

DEUS ENDRO, NEVE-HANV!

War dôn : *Disul vintin p'oan savet,
ha dijunet d'in.*

Kinniget gant doujans da Dir-na-Dor.

Deus endro, neve-amzer, gant da zudi
(dispar,
Gant da zudi dispar,
Da strinka al levenez : O ge tra la la
(la la la la la la la,
Da strinka al levenez, ar spi war an
(douar,
Ar spi war an douar.

*Œuvre d'une toute jeune
fille de Haute-Cornouaille,
élève de Le Moal, - qui m'a
été envoyée par Volke, le 25 mars
1911*

Deus da hada, niverus, bleun lirin er
(prajou,
Ha da wiskan a c'hlazur skouriou sec'h
(ar c'hoajou.

Deus, 'vit ma ray an evned, er brous-
(koad, o neziou,
Ha ma lintro el liorz bleun per hag
(avalou.

Deus, gant ar mintiniou kaer, ma kân
(evnedigou
Ouz sklerder eun heol lintrus, dindan
(gliz an deliou

Deus, gant serr-noziou dispar, ma c'hal-
(lo ar Barzig,
Hunvreal, 'n eul lec'h kuzet, o chilaou
(an estig...

Deus, gant noziou miz Mari, mac'h aimp
(a vandennou,
Da ginnig d'hon Mamm garet c'houez-
(vat hon c'hantikou !

Deus da gas an dud yaouank, bep sul,
(d'ar pardonioù,
Mapleustrfont c'hoaz, gant furnez, gwe-
(nojen o zadou.

Deus da rei d'ar c'hlanvour kez, war e
(wele dispi,
Gant bannou da heol seder, esperans
(ha dudi...

Deus da rei, gant madelez, d'ar paourig
(gwall-eurus,
Goude skorn ar gouanv kaled, ezen
(flour ha grouezus.

Ya, deus prim, amzer garet da zihun
(Breiz-Izel,
A goantiri, a gaerder, marellet he man-
(tel !!

Prix : l'unité, 1 fr. 50 ; franco, 1 fr. 70 ;
les 6, 7 fr. 50 ; les 12, 12 fr. (port en sus).

KOUMANANCHOU ACHU

E miz kerdu, ee'h achue koumanan-
chou bugale :

Kalanhel (3 o deus paeet).

Plouneve-Moedek.

Plounerin.

E miz genver, ec'h achu kouman-
chou bugale :

Sant-Servez : Josep Letertre, Jean
Ar Men, Y.-M. Deuf.

Mikel Gronwel.

strakadennou-daouarn, a lavare sker awalc'h
penôs e oant deut a-ben eus o zol.

Setu aman hanoioù ar c'hoarierien : Evit ar
« Mevel laer », Per Soliman a rae ar Mevel ha
Jul-Mari Boulzec an aotro Barz « Pôtr e vrago
ber » Yan a oa graet gant Joachim Illien, Job
gant Yan-Mari ar Barz, Perig gant Per Plante,
Monan gant Erwan ar C'hlec'h, Fanch Koz
gant Fanch Lancien, Kluden gant Hyacinte
ar Page, an amezeien oa graet gant Fanch Lan-
cien ha Per Conan

Trugarekomp ivez pôtréd vihan Panvrit ! Dre
o gwiskamant gwenn dudius hag o sonerez brao
c'hoariet mat a-gevret, o deus laket c'hoaz mui-
oc'h a vue hag a don ebarz ar gouel.

Pa oe achu d'ar pezh, aotro person Panvrit a
bedas en e bresbitor ar c'hoarierien. Bennoz-
Doue d'ezan evit e digemer ken mat ! 'N em
glevout a oe graet neuze evit an amzer da zont,
rak fellout a ra d'e derc'hel gant al labour-ze
a blij kement d'hon c'henvroiz. Gouelioù a re-
font an al'esa ma vo gallet, en hon yez vrez-
onek, a lavare Luzel anezi :

Ya ! te. yez koz, eo Buez Breiz !

Diduan o c'henvroiz 'zo mat, mes n'eo ket
awalc'h, ha dleet eo ouспен « o skoueria » dre
displegadennou karget a spered kristen. Hen-
nez eo menoz ar Strollad c'hoarierien, ha n'an-
kouaint biken penôs

Ar Brezoneg hag ar Feiz,

A zo breur ha c'hoar e Breiz !

Eur Goeload.

SANT-BRIEG

Marvou

An aotrou Charles Colin, ograouer
an Iliz-veur, a zo maro ar zun-all. An
aotrou Colin a oa brudet bras. Savet
en devoa evit an ograou labourioù dis-
par diwar hon c'hantikou brezonek